

## Plouarzel

## DISKAN

O Sant Arzel, Patron karet,  
N'oc'h ket ganeomp ankounac'het;  
Grit ma c'hellimp dre ho pennoz,  
Mont d'ho meuli d'ar baradoz.

1

Diredomp holl, Plouarzelliz,  
Da enori Tad hon iliz;  
Sant Arzel eo e Breiz-Izel  
Ha Sant Armel e Breiz-Uhel.

2

Kanomp, kanomp a greiz kalon  
Mil meuleudi d'hor Sant Patron,  
'Vit ma teuio, hag hep dale,  
Da venniga e vugale

3

E bro Breiz-Veur e voe ganet  
Eus gouenn nerzus ar Vretoned,  
Hag e kavas 'harz e gavel  
Eur vamm a feiz 'vit e zavel

4

Hag Arzellig abred, abred,  
A zisprizas madou ar bed,  
Hag a zekas gant levez  
Karet jezuz hag ar Werc'hez.

5

Piou a gano e vadelez,  
E zouster vraz, e garantez,  
Evit an holl, bras ha bihan,  
Ouz o gwelet e-kreiz ar boan ?

6

Pa voe galvet gant e Salver :  
Savit d'an nenv, gwir servicher,  
E kimiadas diouz ar bed-man :  
Er baradoz ema breman.

7

Kemeromp skouer war Sant Arzel.  
Klaskomp d'hon tro beza santel,  
Hag eveltan, drant ha dילו,  
D'ar baradoz ni a nijo.

